

KINNIG LABOUR

RENER / RENEREZ

STUMDI

Stummañ tud deuet d'ar brezhoneg a ra ar gevredigezh STUMDI abaoe 36 vloaz. Hor c'hreizenn stummañ, hag a zo he sez e Landerne, he deus degemeret ouzhpenn 2500 stajiad e stumadurioù hir abaoe 1996. Ar stajidi dilabour a vez kinniget dezho ur servij efedus da ambroug anezho war-zug an implij e brezhoneg. Bep bloaz e vez kinniget stajoù berr nevez.

He rener / renerez e klask STUMDI hiziv.

En e garg e vo 15 stummer entitlet hag un dek vakataer, war 7 lec'h stummañ (en departamantoù 29, 56 ha 22), hag ur skipailh melestradur a 5 implijadez.

Buan e ranko ar post bezañ pourvezet.

Kefridioù hag atebegezhioù ar rener a vo lakaet e pleustr e framm un dileuriadenn galloudoù hag atebegezhioù a-berzh ar Prezidant en domanioù-mañ :

- Mont en-dro ar greizenn,
- Diorren an obererezh,
- Dileuriañ ar gevredigezh.

En e gichen, ha renet o labour gantañ, e vo :

- Penn ar servij pedagogel,
- Ar skoazellerez renañ, hag a zo e karg eus ar c'hehentiñ ivez,
- Penn ar servij melestradurel hag he c'henlabourez,
- Penn an heñchañ war-zu bed al labour e bezhoneg.

Harpet e vo gant servijoù diavaez dreist-holl evit merañ ar c'hontoù hag ar budjedoù eus un tu, hag evit ar c'huzuliañ war ar gwir.

OBEREREZHIOU PENNAÑ

- 1 Mont en-dro ar greizenn
- Merañ obererezh kreiz Stumdi : leviañ ha priziañ ar stummadurioù, ambroug ar stajidi
 - Merañ ar velestradurezh hag an arc'hant : budjedoù, danevelloù an arc'hant, teñzorerezh, merañ an dafar
 - Merañ ar c'hoskor
 - Bezañ e darempred gant ar c'huzul-merañ ; merañ an diviz sokial gant dileuridi ar c'hoskor
 - Eveshaat war an nevezentioù lezennel : redioù lezennel an embregerezhioù, emdreiñ ar stignadoù stummañ hag an doareoù ma vezont arc'hantet

2 Diorren obererezh STUMDI

- Labourat da zalc'her gant an oberezh a zo hiziv
- Klask marc'hadoù nevez
- Krouiñ ostilhoù nevez
- Diorren ar stummañ a-bell

3 Dileuriañ ar gevredigezh

- Dileuriañ ar gevredigezh dirak strollegezhioù lec'hel, er bedoù sevenadurel hag ekonomikel, e-kichen an aozadurioù stummañ all.

AN DEN A GLASKER

Ar post a vefe mat d'un atebeg en deus skiant-prenet, eus bed ar c'hevredigezhioù pe hini an embregerezhioù.

Anaout bed ar stummañ a vefe deuet mat.

Barregezhioù solut en do en domanioù-mañ :

- Diorren raktresoù,
- Merañ ar c'hoskor,
- Merañ ar velestradurezh hag an arc'hant.

Gant ar brezhoneg e reer er gevredigezh STUMDI, setu ma c'hortozer digant ar rener bezañ en e aes koulz dre skrid ha dre gomz.

A-hend-all e ranko an den war ar renk :

- Kaout ur spered krouiñ, sellet war-zug an dazont, raktresañ,
- Unaniñ an holl implijidi en-dro da raktres ar gevredigezh,
- Bezañ gouest da vont er rouedadoù ha da gemer perzh enno a-zevri.

PERZHIOU AR POST

Ar post zo e sez ar gevredigezh, e Landerne. Mont a ranko a-wechoù d'al lec'hioù stummañ all (Brest, Plañvour, Aradon, Gwengamp, Sant-Brieg), ha da emvodoù gant kevelerien a bep seurt (Roazhon, Karaez...).

Aotre-bleniañ ret.

Stag eo ar greizenn stummañ ouzh emglev labour a-stroll an aozadurioù stummañ dibaouez. Gopr ar rener, a statud sterner, a glot gant ar pazennoù 28 pe 29, gant un emglev treziad devezhioù war ar bloavezh.

A-hend-all en do kement gratadenn voutin d'an holl implijidi :

- Tikiji restaorant,
- Kenwarez (Mutuelle),
- Difrejet eus ar mizoù hent ma kemer e oto dezhañ.

Kas CV ha lizher emginnig da Brezidant ar gevredigezh d'ar chomlec'h-mañ, a-benn ar 5 a viz Meurzh 2022 :

- STUMDI - Kreizenn Théo Le Borgne - 1 straed Dr Pouliquen - 29800 LANDERNE
- prezidant@stumdi.bzh